

**Maria Prat Ma devez kaerrañ
C'hoarierien**

**Jakez ar Hornichoned.... 90 vloaz
Ar mêr
Ujen, paotr an interamañchou
Mark ar Mouller
Paulette, e vatez
Per, niz Javon
Javon, e niz.
Liz , ar vatez**

Pennad kentañ

Liz

(O skubañ). Laret vez, goude ver skuiz eh eer pell, med me zo arru tremen skuiz en dro-mañ, ha n'in ket pell ken.

Nann, chomin ket da vatez gand an orijinal koz-mañ, Jakez ar Hornichoned.

Lared a ra din skubañ ha diboultrañ, med avad n'intent ket e vefe distaget ar gwiad-kevnid war digarez, emezañ, eo eur labour re fin ha greet gand eur loen ken bihan, ha penaoz eun den dorniet mad n'eo ket kap d'ober kemend-all. Nann, den n'eo kap d'ober gwiad-kevnid.

Ujen

(O tond).

Salud! salud!

Liz

Salud 'ta, aotrou.

Ujen

Ma gourhemennou a gengañv.

Liz

(Souezet). A gengañv?

Ujen

Ya, me eo paotr an interamañchou. Kaset ahanon da gambr an den maro, mar plij.

Liz

Med, med amañ n'eus den maro ebed. 'N em dromplet oh a di.

Ujen

(O tapoud e baperenn). 'N em dromplet? Med n'eo ket amañ emañ ti Jakez ar Hornichoned? Telefonet zo d'an ti da lared dond da 'n em intent evid ober interamant Jakez.

Liz

Unan bennag 'n-eus greet se neuze evid tapoud ahanoh dre besk-ebrel.

Ujen

'Vez ket memestra c'hoariet gand treou evel-se!

Jakez

(O tond). Nann, nann, me eo am-eus galvet ahanoh. Bezet, ma den, arru mad. *(Starda a reont o daouarn)*.

Liz

Ma! ma! d'ho noad o c'hoari troiou? Daoust pegoulz e torro deoh ive?

Ujen

Med penaoz? C'hwi eo an den maro?

Jakez

Ya 'ta, me 'm-eus deg vloaz ha pevar-ugent sonnet.

Ujen

Hañ! serz avad d'ho noad, med... med... ne gomprenan ket perag?

Jakez

Ne gomprenet ket? Neuze 'ta n'anavezet ket ho micher?

Ujen

Geo avad, a gredan; me zo ugent vloaz 'zo o lieni hag oh interi tud varo, med avad ne oa ket bet digouezet c'hoaz kregi gand unan beo.

Jakez

(Da Liz). Med c'hwi, sapre Liz, e-leh chom aze digor ho kenou, et da dapoud eur voutailad gwin mad ha teir gwerenn rag an drived zo d'arruoud, an Aotrou Mêr ah on o hortoz ive.

Liz

(O vond er-mêz). An Aotrou Mêr d'arruoud ive? Ha da betra? Da gontradi ahanoh? Hag eun all zo arru da archedi. Hañ! amañ emañ an devez braz hirie avad!

Jakez

Soursiet deuz ho krapouez, koz komer. Me gred 'm-eus noad a-walh da houd petra 'm-eus d'ober.? (*Tak! Tak!*) Deut e-barz!

Hañ, salud, Aotrou Mêr! Pa ver o komz euz ar bleiz 'vez gwelet e lost, pe dost.

Ar Mêr

(*O tond*). Salud, salud 'ta! E oah o komz ouzin? Penaoz 'ta emañ kont? (*Strada a reont o daouarn*).

Ujen

Mad sur, 'vel kustum.

Jakez

Me 'h a mad-kaer ive, med avad c'hwi 'm-eus aon zo berr war ho kezeg. Da betra 'peus kaset kement-se? Med azezet 'ta dustu. Ha c'hwi ive. (*Azeza reont o-zri*).

Ar Mêr

(*Oh azezañ*). N'eo ket hastañ, med n'on ket 'n em jeu, eun den foutu!

Ujen

Foutu a laret? Me 'h a da verkañ neuze abalamour da vired ho renk deoh.

Jakez

N'et ket 'velkent da bropoz dezañ, rag n'eo ket koz c'hoaz.

Jakez

Petra? arru 'm-eus hanter-kant vloaz.

Liz

(*Gand he boutaill*). Demad! Sellet 'ta! arru oah, Aotrou Mêr?

Ar Mêr

Demad, demad 'ta! Arru e oan, ya, ha d'ar houlz vad me gred p'emañ Liz o tond gand he boutaill.

Liz

(*O tiskenn*). Ya 'ta, laret 'n-eus ma mestr koz din : « Kerhet eur bannah treou mad. » N'ouzon ket petra vefe a-nevez gantañ, nemed bezañ e vefe o klask an tu da dimezi?

Ar Mêr

Me 'm-eus c'hoant da zoñjal evel-se ive.

Ujen

Me avad, ne zoñjan ket evelдох, rag pa vez eun eured a'z tu-mañ, ne vez ket klasket paotr an "interamañchou". Nann! Ne gomprenan ket da betra zo laret din dond amañ.

Jakez

Trinkom bepred ha goude e welfet da betra oh galvet amañ.

Ar Mêr

Ya, trinkom 'ta da yehed Jakez koz, ma vevo keid-all c'hoaz. (*Trinkañ a reont*).

Liz

(*'N eur vond gand he boutaill emañ*). Neuze, ma vev deg vloaz ha pevar-ugent c'hoaz, me oar piou na vo ket war-dro ar haskaler-mañ

Jakez

War ze, eh an da lared deoh bremañ da betra 'm-eus galvet ahanoh amañ, da brepari din ma devez braz, ma devez kaerrañ.

Ujen

An devez kaerrañ? Hañ, feiz 'vad, me 'm-eus bet klevet meur a gristen o lared penaoz an devez kaerrañ deuz o buhez a ve devez o maro.

Evid pa vent sur da vond d'ar Baradoz.

Ar Mêr

Ya, ya, med evid Jakez, an devez kaerrañ 'h a da vezañ devez e eured, rag kredet ahanon, amañ zo eun dra bennag o hori.

Jakez

Cheñchet kaoz, mar plich, evelkent pa 'm-eus bevet dizoursi beteg vremañ, n'eo ket da deg vloaz ha pevar-ugent eh afen-me da 'n em leuriañ gand eur goukoug, geo?

Nann, ar pezh ah eom da brepari ha da weled eo gweled penaoz vo greet ma interamant.

Ar Mêr

Hañ, feiz, 'm-oa ket klevet kemend-all c'hoaz; med pegoulz oh in-zell da vervel?

Jakez

Diwezañ ma hallin, med betegoud e teufe din a-greiz-toud teurkañ ma zroad gand eur beg mên.

Ar Mêr

Ha terri ho korn-butun.

Ujen

En dro-ze me gred penaoz n'eo ket c'hwi, med ar re a vo war ho lerh eo a zoursio deuz ober hoh interamant.

Jakez

Hop la! me gred penaoz eo an hini a vez an devez gantañ a zo da gomandi, hag en deiz-se, pa vo ma devez braz, n'em-eus ket a hoant e vefe pep hini o lared e damm hag o soursial deuz ar pezh na zello ket anezañ.

Nann, me 'm-eus c'hoant da gaoud eun interamant 'vel zo gleet, ha n'houllan ket e vefe sabotet ma gouel diwezañ.

Ujen

Med n'et ket da gaoud aon. Greet vo an treou evel d'ar zul, pomponou war ar horbillar hag an treou all deuz-se.

Jakez

Ya, ya, êzet eo deoh lared ze din bremañ, pa ouzoh a-walh ne vin ket war ar plas da gontroli.

Ar Mêr

Petra? Ne vefet ket war ar plas? Me houlenn peleh e vefet 'ta en deiz-se ma ne vet ket war ar plas? Er penn a-raog zoken.

Jakez

Pa laran, peogwir me a baeo, 'm-eus c'hoant vefe greet ma bolontez diwezañ, ar pezh 'mo laret. Kemeret ho kaier, ha merket.

Ar Mêr

(Da Ujen). Me gred ne gavet ket kalz a dud evel-henn? Me, avad, nebeutañ tra a jen ahanon eo goud penaoz vo greet ma interamant.

Ujen

Kalz a rêzon a roan deoh war ze, Aotrou Mêr.

Jakez

Kalz a rêzon? Kalz a dor, ya, med pep hini a gav mad 'vel a ra.

Med dalhom bepred gand ar pezh a zell ahanon. *(Da Ujen)*. Gwelom petore klas vefe ar zersañ? Ar hlas braz 'michañs; ne chipotin ket war ar briz, med c'hoant 'm-eus vefe beo an treou.

Ujen

Beo an treou? beo an dud, zoken an hini maro marteze.

Jakez

Arsa, komprenet ahanon ervad : n'houllan ket e vefe paour na trist an treou; me 'm-eus biskoaz lakeet boned noz na greet penn-koz ha n'eo ket en deiz-se 'mo c'hoant d'ober ive.

Ar Mêr

Mar keret, me lakeo deoh ma zok foñs uhel.

Ujen

Hag ho seizenn, Aotrou Mêr.

Jakez

Mil toner! eur wech evid mad, laret din pegement a gousto, ma paein dustu eun interamant war an ton uhellañ, kwa.

Ar Mée

War don ar hrampouez-gwiniz, laret 'ta!

Ujen

(*O verkañ*). Red eo din merkañ da gentañ. Gwelom petra 'peus c'hoant, vefe er penn a-raog.

Jakez

Ar groaz aour bepred gand eur goulou 'beb tu dezi.

Ar Mêr

Med penaoz? N'oh ket 'vel vez laret, zoudard koz.

Jakez

Geo, me zoñj, bleset, prizoniet, evadet, seiz medalenn din.

Ujen

Med neuze vo red kaoud eun den, eur zoudard koz evelдох da dougen ar medalennou-ze war eun oreille.

Jakez

Hola 'vad! war eun oreille?

Ar Mêr

'Vel just, ma 'peus c'hoant d'ober an treou ledan. Rag n'e-peus ket 'velkent tra-walh a vedalennou da gargañ eur garrigell?

Jakez

Kerhet ive daou goz all da dougen an drapo (*Amañ ar Mêr a gemer e garned*), med gwasañ tra a zo, goud hag-eñ vo barreg ar gamaradou koz-se da vond ervad d'ar paz?

Ujen

Petra? D'ar paz 'n eun interamant? Med ne vo ket 'michañs eur bale militer.

Jakez

Med pa laran, 'm-eus c'hoant vefe komzet deuz ma interamant.

Ar Mêr

Med da betra neuze neuze vefe ket lakeet digas eun detachamant deuz martoloded Lan-Bihoue. Ar re-ze vad ah afe d'ar paz, ha ne vefe ket d'ar paz ki.

Jakez

Kaerroh evid se, goulennet 'm-eus ar Majoretet!

Ujen

Hañ, en dro-mañ memez tra, med petra a zoñjet?

Jakez

Zoñjal sur ne vo ket divalo gweled ar vandenn merhed yaouank-se o terhen kompagnunez din 'n em baleadenn diwezañ.

Ar Mêr

Ba... baleadenn? C'hwi, me zoñj, ne vafefet ket.

Jakez

Nann, nann, en zoñj on da vezañ douget d'am zro ive.

Ujen

Gwasañ tra zo, an dimezelled-se marteze n'o-devo ket ar memez paz gand paotred Lan-Bihoue.

Jakez

Biskoaz kemend-all ganeoh, 'vid da heul ar muzik a gleont mond?

Ar Mêr

Med neuze 'ta oh in-zell vefe muzik ive?

Jakez

Ma feiz, 'vid c'hwi zo pell oh esaad kompren. 'Vez ket, moarvad, gouel breizeg ebed heb bombard ha biniou.

Ujen

Hag ar hlik 'vel just. Med petotre muzik vo gante? Petra fell deoh kleved en deiz-se?

Jakez

Feiz 'vad, 'vid eur wech, pa'h on soudard-koz, ar "Madeloñ".

Ar Mêr

Neuze e renko an Aotrou Person antoni "ar madeloñ" en eur ober ar zav-korv. Kad a raio e gont?

Hag ar hleier, petra 'devo d'ober zon? Glaz braz? pe brallañ 'vel da zul Fask?

Jakez

Karillon, me gred.

Ujen

Hañ ya, 'vel kleier Kergalaon.

Karillon,

Brizillon,

Jakoig zo maro

Ha piou a herito?

Jakez

'M-eus ket laret deoh c'hoaz em-oa goulennet Kelh Keltieg Plistin.

Ar Mêr

Aze emañ ze. Ar re-ze bepred n'eont nebleh heb dañsal. Gweled a ran e kontet war toud ar sosieteou.

Pa laran vo muioh heñvel an treou deuz Malarjez evid deuz eun interamant.

Jakez

Ne ran ket a forz. Red eo respeti bolontez eun den maro.

Ujen

Med n'oh ket maro bremañ.

Jakez

'Benn neuze vin, ya, med, sellet c'hoaz, 'm-eus ket komzet deuz ar re a vo o tougen fleur. Bugale an diou skol?

Ar Mêr

Hañ, gortozet memez tra. Muioh deread e vefe lakaad koz gwrahed koz pe selibaterien evelдох. N'ouzon ket petra a laro ma hoñseillerien o kleved komz euz kement-mañ a dralala.

Med, 'benn vefet-c'hwi maro, sur e vo bet votadeg ha cheñchet koñseillerien 'michañs.

Ujen

Ya, 'benn neuze vo maro kalz a dud nan int ket klañv c'hoaz, med da hortoz se, Jakez, me gred, e-peus ankouaet ar lizerou.

Ar Mêr

Petra? liz... lizerou? Da bedi an dud da vond d'an interamant?

Jakez

Ya, Aotrou Mêr, « les faire-part » 'vel vez laret e galleg. Med greet int dija gand ma dorn ma-unan.

Ujen

Hañ, eur rekor ar seurt deoh, n'eus ket.

Jakez

Feiz 'vad, kleo! Kontañ war an dud all o-dije greet 'n o giz, berr-ha-berr, eh on ive o hortoz ar mouller da dond da diskwel din eur model. 'Vel-se ne chomo nemed an deiz da lakaad, hag evel-se sur ne vo ankouaet hini ebed deuz am hamaradou na pedet hini ebed deuz ma enebourien.

Ar Mêr

Ya, med ho kamaradou marteze vo maro kazi toud 'benn neuze hag hoh enebourien a vo difach.

Ujen

Ha setu vo red adober an adresou.

Jakez

A! ba! ba! c'hwi wel an treou a-dreuz goude vent a-hed.
Med, klevet 'ta, dre beleh eh aio ar hortej?

Ujen

(*O c'hoarzin*). Ar hortej? eme Jakez. Feiz 'vad, n'eus nemed c'hweh kammed ahann d'an iliz, ha daouzeg d'ar vered.

Jakez

Teu! teu! teu! vo ket trohet ken berr-ze. Me 'm-eus c'hoant da vezañ baleet eun tamm.

Ujen

Red e vo klask tro evid diverrañ, evid koll amzer.

Jakez

Koll amzer? Daoust hag-eñ vefe ket barreg an dud da lakaad eun devez 'n em herz?

Ar Mêr

Ola! Ola!, chomfor ket eun devez da redeg ruiou kêr ganeoh avad.

Jakez

Arsa, eur wech c'hoaz, n'eo ket perhenn an devez a zo da gomandi?

Me 'mo c'hoant en deiz-se da dremen dre ar pont nevez hag an hini koz da zevel da blasenn gêr ha da areti dirag ar mêri, leh mo droed da gaoud eur brezegenn diganeoh, hag unan torchet, hañ, Aotrou Mêr?

Ujen

Ne gredan biken e kousantfe ar polis areti ar gweturiou evid lezel eur halvakad 'vel a leret aze da dremen dre ar ruiou -ze toud.

Jakez

(Reud). 'Velkent ha goude, 'pad ma buhez 'm-eus renket bale dre an trotouerou, lamped en toufleziou diwar hent an otomobilien. 'Hanta en deiz-se e vo ma zro da gaoud, n'eo ket priorite a-zehou, med priorite dre greiz ar ru.

Ujen

Red e vo klask ruiou ledan abalamour d'an dud da gaoud plas da dond da zelled deuz ar hortej. Petore chalivari!

Jakez

Ha plas da baotred ar hordonennou. Ar re-ze 'm-eus c'hoant vefe douget gand pevar goñseiller jeneral.

Ar Mêr

A zo kaerroh c'hoaz, med da beleh 'h efet da glask aneze? Me gred pevar deuz ma hoñseillerien da bemdez a vo mad. Med a-brepoz, me gred e-peus ankouaet ar pred. Peleh e vo ar friko?

Jakez

(O sevel). Ar friko? En otel "Breiz" oan o soñjal lared deoh dond ganin bremañ d'ober marhad deuz ar pred, da weled petore meuziou a dijerfe an dud ar gwellañ en deiz-se.

Ar Mêr

Petore meuziou? Eur plad teod bepred abalamour d'an dud da vlagal ha da ganañ.
(Dond a reont er-mêz).

Ujen

(*O skei war skoaz ar Mêr*). Hañ! hañ! Ar helou gwellañ deom avad d'ober ar marhad-se hag e-meum beb a aperitif da heul.

Liz

(*O tond*). O vond da beleh evel-se?

Jakez

O vond da lakaad ober pred ma interamant.

Liz

(*O tastum ar gwer*). Pa laran bezañ eo hemañ eun orustal. Abaoe 'h on matez gantañ 'h on bet ken mezevennet ken 'm-eus ket bet na zoñj nag amzer da dimezi, ha marteze, well a ze evidon, rag ma 'mije bet eun houad evel Jakez, vijen bet maro pe zod 'benn bremañ.

Javon

(*O tond gand fleur*). Demad, Liz. Arru 'h on adarre eur wech ouspenn. Goud a ret ne vankan bloavez ebed da dond da weled Tonton Jakez devez e ouel. 'Michañs emañ er gêr?

Liz

Ma feiz 'mañ ket avad. Emañ o paouez tehel da lakaad ober e interamant gand ar Mêr ha paotr an interamañchou.

Javon

(*Stad enni*). Hañ ya, neuze da vihanna a 'n em zant pare?

Liz

Pare, a leret? 'Benn neuze, n'eo ket pare bepred da lakaad komz outañ. Doan 'n-eus vefe ket greet tra-walh a charre gand e interamant.

Per

(*O tond gand eur voutaill*). Salud, toud an dud. Sell 'ta! ma hinterv! Te zo deut ive? 'Vel just, evid gouel an Tonton.

Javon

Ya, med n'on ket deut a galon vad. Ha te, 'michañs, a zo evel don ive.

Liz

Da hortoz se, eh a da gaoud bleuniou ha boutailladou treou. Ha peogwir e vank lorhaj dezañ ! Med azezet 'ta, me 'h a da aozañ koan hag e chomfet. (*Mond a ra er-mêz*).

Per

Med da beleh eo eet an Tonton? Da drohañ e vleo marteze pa ne blij ket dezañ ar bleo hir evel ar hiz. (*Azezañ a reont*).

Javon

Med nann. Zoñj dit eo eet da lakaad ober e interamant.

Per

(Seder). Petore kelou mad! Ze diskwel da vihannañ eo krog da labourad deuz dindan e dok ha da dinerzañ.

Javon

Kentoh vefom dinerzet nim o tougen fleur ha treou amañ. Evuruzamant vez kavet treou marhad-mad hag eñ ne oar ket. Med lez-hañ hardi, ma 'nefe bet fleur 'n e-veo, pa vo maro 'nevo ket 'vid deuz ma helou.

Per

Na deuz ma helou-me ive. Rag houmañ oa eur jeu v Rao pa oa nevez, med n'eo ket ken. Ha ne oar den pegoulz e torro ar hoz Tonton besk-se e gorn butun! Ha red dim tremen dioutañ abalamour d'an heritaj.

Javon

Abalamour d'an heritaj sur, ma 'nefe bet dispignet toud e dreou o lakaad ober diskouriou ha bombañsou gand e interamant.

Per

Kaozeom brao outañ bepred ha marteze e laro dim peleh emañ e arhant.

Jakez

(O tond). Sellet 'ta piou? Ma niz, ma nizez.

Per

(O stardañ an daouaran). Ya 'ta, ma Zonton, demad deoh. Derhen ret ho krog?

Jakez

Ya 'ta, welloh evid biskoaz.

Javon

(Memez tra). Well a ze da vihannañ, ma Zonton koz, ma'h a mad ho yehed. Deut on evel ma welet da digas deoh eun tamm fleur evid ho teg vloaz ha pevar-ugent. *(Rei a ra bleuniou dezañ)*.

Per

A! me 'm-eus greet memez tra. Digaset 'm-eus deoh, sellet! eur voutailad gwin fin. Ken evuruz om o weled ahanoh o terhen da gozañ.

Javon

Hag a jom serz. C'hwi 'h aio da gant vloaz.

Jakez

Ma ouvezfen rafe ze plijadur deoh, 'benn neuze avad e-mo arru eun toullad podou fleur, ha gwin koz. Trugarez deoh evid ar re-mañ. Med penaoz, gand an treñ, oh deut? Neuze marteze, betegoud ratoud anezañda return, e vije poent deoh.

Per

Poent dim? C'hoant 'peus da lared vefe poent dim karzañ? Tagnouz koz!

Javon

'Hanta ya, neuze eh eom da garzañ, kuit da chom da rentañ frejou deoh, pa n'oh ket troet da lared dim peleh emañ hoh arhant. Kenavo,selled. Ya, kenavo. (*Mond a reont er-mêz*).

Jakez

Despet a ra din 'peus ket amzer da chom gand ho koan. (*Da Liz a zo o tond*).

Sellet, Liz, petore merk a garantez a-berz ma nizien, pebez plantenn vrao , ha gwin koz.

Liz

Ma soñj deoh o-deus ar re-ze eun dalvoudegez bennag, ne zoñjet ket emaint o tremen lost ar loue dre ho kenou. Skuiz o hortoz ahanoh da eeunañ bizied ho treid abalamour da gaoud heritaj.

Jakez

Hañ, 'vel-se 'mañ kont.? Dalet, neuze. Kaset ar hoz treou er-mêz.

Liz

'H an da skei houmañ leh vo ket gwelet ken. (*Mond a ra er-mêz*).

Mark

(*O tond*). Salud! Salud! Jakez koz. Arru 'h on 'velkent.

Jakez

Hañ! hañ! arru paotr al lizerou. Bezañ 'zo eur model ganeoh?

Mark

(*O tisplegañ unan*). Ya, ya. Setu amañ ar model Klas kentañ, ar hiz diwezañ.

Jakez

Toud ar hiziou, eme an aotrou
pa n'ee ket e reor 'n e vragou.

Klaz re ledan ar varrenn du. An eil tra deuz egile. Me n'an ket da lared da den ebed
penaoz ober e interamant. Med avad, ma hini vo greet d'an gout, orijinal
eveldon-me.

Mark

Ma feiz ya 'vad, orijinal eun tamm. Rag me 'm-oa ket bet gwelet den ebed 'n e veo oh
ober lizerou "faire-part" c'hoaz.

Jakez

Ze zo kaoz vent greet a-bennboual ive, an nizien o klask krennañ ar frejou 'vid ma vo
brasoh an heritaj.

Med ped lizer ho-peus greet?

Mark

Feiz 'vad, pemp kant. Kement-se a añvelopjou ho-peus digaset din, adreset ha toud.

Jakez

Bet 'm-eus torr-penn o klask gand piou da bedi, med bremañ 'h on sur, 'm-eus
ankouaet hini ebed deuz ma mignoned.

Mark

Gwasañ tra 'benn neuze, kalz euz ar pemp-kant-se a vo maro ha kalz all vo fachtet.

Jakez

(O skei e droad). Eur wech c'hoaz, perhenn an devez a zo da gomandi. Ha bremañ,
lennet din ar lizer, ma welin petra 'peus merket.

Mark

(O lenn). « Pedet oh da interamant Jakez ar Hornichoned, marvet deh war ar bale,
goude bezañ debret e goan diwezañ.

Zoudard klas kentañ er brezel pevarzeg.

Kentañ prizonier 'n em evadet.

Kroaz a vrezel gand lore, ha seiz medalenn all da heul. Prezidant a enor ar Vrakonerien.

Kentañ Koñseiller gand ar balotaj.

Rener ar Hoarierien boulou "Koll beb tro".

Trezorier sosiete ar Ramonerien chiminalou.

Iz-Prezidant ar hoarierien "Manille-coinchée".

Trezorier an daol doull hag ar bank en-derout.

Pañsionet kant dre gant deuz Breuriez an dud dilabour.
Diazezer Kleub ar hoz paotred-yaouank-koz.»

Mad eo 'vel-se?

Jakez

Neus ket muiioh evid-se? N'eus titr ebed ken?

Mark

Me gred eo arru hir a-walh ar listenn evel-se.

Med n'on ket kap da lakaad an deiz nag ho noad, nag hano ho kerent betegoud 'vent maro a-raog deoh.

Paulette

(O tonnd). Ma digarezet, ma fatron, me zo digaset war ho lerh.

Mark

Petra? Med petra zo neuze?

Paulette

Feiz sur! Penaoz, an den-mañ eo Jakez?

C'hwi eo Jakez ar Hornichoned?

Jakez

Ya, ya. Me eo Jakez.

Paulette

Med, neuze, n'oh ket maro?

Mark

Med petra zo? Ne gomprenan ket.

Paulette

'Hanta, setu amañ petra zo arruet.

Ar skrivagnerez nevez he-deus kavet war ar buro an doubl deuz ar lizer a zo ganeoh aze, hag he-deus merket pemp kant, ha kaset aneze d'ar post.

Mark

(O lamped). Med honnez zo zod! Gwelet a-walh 'deus ne oa deiziad ebed warne.

Paulette

Telefonet he-deus da dud an interamañchou.

Jakez

Eo, lakeet ma interamant ha me beo yah.

Paulette

Ma feiz ya 'vad, lakeet eo ar zav-korv dilun da zeg eur.

Jakez

(O vlagi). Hañ feiz, hemañ eo an taol kaerrañ 'vad. Er gont-se e hallin mond d'am interamant, kleved an diskouriou ha mond d'am mern gand an dougerien.

Mark

Mil toner, ar pezh zo d'ober eo mond d'ar post da gerhed ar lizerou a-raog vont eet en gwetur ar fakteur.

Paulette

Med o tond deuz ar post eh on ha n'eus netra d'ober. N'int ket roet din.

Mark

(O skrapad e benn). Hañ, hemañ eo "le bouquet", 'vel vez laret. Biken, paour-kêz Jakez, vefet maro, hañ, ha prest da vond d'ar vered 'benn dilun, nemed ober a rafeh evel emañ ar hiz bremañ, 'n em drogañ, emberr da noz a-raog mond da gousked.

Jakez

Med nann, me eo bet plijet din a-viskoaz ober farsou, ha hemañ da zeg vloaz ha pevar-ugent 'h a da vezañ an hini sersañ.

Hirie emañ an dregont a viz meurz. 'Benn dilun e vo pesk ebrel hag e vo tapet pemp kant a dud.

Mark

Med piou a baeo ar frejou?

Jakez

'Vet ket nehet. An eil kont a deu din d'eben, pe baeañ diou wech ma interamant, pe rei ma zreou d'am nizien, 'vel-se vo ket a drouz abalamour d'am heritaj.

Mark

Ha Doue da bardoni Jakez.